

# Sah koz, Sah Kozig Sarkozig !

“Sah Koz” e-noa laret e oa kazi an hini kenta dirag moger Berlin... a-raog ma oa distrujet ar voger-ze.

Poent braz eo lakaad eun tammig fent gand an dastumad bidennoù-mañ, tapet war iñternet, klokeet ha kempennet eun tammig... doare d'en em zizamma eun tammig !

Gwechall ganeom, e veze greet “Fañch Mit” deuz Mitterrand... Perag ne rafem ket “Sah Koz” deuz Sarkozy-Sah-Kozig ?

\*

## Sah Koz hag ar mediaou

-Sah Koz e-neus saveteet Alstom ha dieubet Betancourt.

-Sah Koz a hall gronna e enebourien e-unan.

-Piou e-neus lavaret e-noa Sah-Koz eur montr Rolex ? N'eo ket gwir tamm ebed : Sah Koz n'e-neus ezomm montr ebed ; eñ an hini eo a ra an eur<sup>1</sup>.

\*

## Sah Koz dre ar bed oll

Ar Suised n'int ket “neptu” ; gortoz a reont da houzoud gand peseurt tu ema Sah Koz.

\*

## Sah Koz en ostaliri

-Sah Koz e-neus komandet eur pizza, ha santet e-neus ar pizza.

-Pa gouez e drañchenn vara, ar hoñfitur a cheñch tu.

\*

## Sah Koz er gêr

-Sah Koz a lez atao ar goulou war-enaou : n'e-neus ket aon dirag an deñvalijenn, an deñvalijenn an hini he-deus aon dirazañ.

-Sah Koz a hall stlaka eun nor serret.

-Sah Koz a oar lezel eur mesaj a-raog ar “bip”.

-Sah Koz ne wel ket e skeudenn er melezour peogwir n'eus nemed EUR Sah Koz<sup>2</sup>

\*

---

<sup>1</sup> D'ar mediaou, êz gouzoud !

<sup>2</sup> Etrezom hag a vouez izel : dre chañs !

## Sah Koz hag ar peskig ebrel

-War deziadur Sah Koz, n'eus deiz kenta a viz Ebrel ebed : den ne gredfe c'hoari peskig ebrel dezañ.

\*

## Sah Koz hag ar yehed

-Sah Koz a hall para ar hrign-beo gand eun daerenn hepken... Siwaz, Sah Koz ne ouel ket : Sah Koz eo a laka ar pennou-ognon da ouela.

-Muzuliet e vez lammou-kalon Sah-Koz gand ar skeul RICHTER.

\*

## Sah Koz Ha Superman

-Sah Koz ha Superman zo o c'hoari "bras de fer" ; an hini a gollo a ranko lakaad e slip a-zu d'e bijama.

\*

## Sah Koz hag an avel

-Sah Koz, pa staot a-eneb d'an avel, e cheñch tu an avel.

-N'eo ket Sah Koz a zo uhel an avel en e benn ; an avel an hini eo a zo uhel Sah Koz en e benn.

\*

## Sah Koz hag ar matematikou

-Sah Koz a oar desimal diweza an niverenn Pi.

-Sah Koz a hall ranna dre vann.

-Sah Koz zo deut a-benn da gonta beteg an iñfini... diou wech zoken !

\*

## Sah Sah-Koz

Hervez eun enklask, 30 % deuz ar wazed o-deus o houillenn<sup>3</sup> gleiz brasoh ; gand Sah Koz, peb kouillenn zo brasoh evid eben.

\*

## Doue ha Sah Koz

P'e-noa an Aotrou Doue laret :

---

<sup>3</sup> « Kouillenn »... pe « Sah »... just a-walh !

- Ra vo sklêrijenn !
- Sah Koz e-noa gourhemennet :
- Lavar « mar plij » da genta !

\*

\*\*

\*

Jesuz Krist zo bet ganet e 1955 a-raog Sah-Koz

Miz du 2009